

16.

Pa glevimp ar c'hleier o son,  
Ni a zonjo er Mission ;  
Ni a zonjo er Mission,  
He deuz d'eomp oll roet pardon.

17.

Bouzar ? oh ! nan ne vezo mui,  
Goude ar Mission, hini !...  
Ar groaz a vo harpet bepred  
Gant tud Goulien, gwir Vretouned.



# KANTIK SANT GOULIEN

Var don : *Iliz Plouzeniel.*

1.

Hon tadou koz, ar Vretouned,  
Ar Zent euz Breiz ho deuz karet ;  
Oll evel'd-ho, a greiz kalon,  
Rentomp enor d'hor zant Patron.

DISKAN :


*Meulomp hor Patron, sant Goulien,  
'Zo evid-omp eun eienen,  
Eun eienen a zantelez, ) bis.  
A furnez hag a vouisiegez. )*

2.

He gerent a oa euz Breiz-Veur,  
Breiziz, en daou du, 'zo breudeur.  
Setu gant-ho ho bro kuiteet,  
Dirak tud kriz 'rankont tec'het.

3.


Digouez a reont e Plouider,  
Ho hag heb stur, hag heb diner ;  
Hag ar vamm 'zo braz he anken :  
Ne gav na dour, na ti, na toen !



IMPRIMATUR :

Quimper, le 9 Février 1904.

F. CORRISSOU, Vic. gén.



4.

Dre bedennou ha tad ha mamm  
Eur feunteun a zao gant dour splamm,  
'Vit diskuez 'vije ar bugel  
Ha fur, ha desket, ha santel.

5.

Goulien 'ra fae var ar madou  
Hag ive var an enoriou ;  
Sevel a ra eun tamm lochenn  
'Vit ober enn-hi pinijen.

6.

An dud, o tont a vandennou,  
A ra, dre ar c'hoat, kalz strejou ;  
C'hui, o tarempred he iliz,  
'Zei d'ar baradoz, Goulianiz.

7.

E-c'harz ar groaz, ar c'hont Even  
O pedi a gav sant Goulien,  
Pa zisken er vro ar Zaozon,  
Tud dibater ha digalon.

8.

Ha ni ive, e pep anken,  
Pedomp hor Patron, sant Goulien,  
Pedomp stard ; e-c'harz treid ar groaz  
Ne vo re zamm var hon diouskoaz

9.

Pedomp 'vit ar Frans, evit Breiz  
Ma kendalc'hint ato d'ho Feiz,  
Ma chomo gan'eomp e pep ti  
E renk huel ar Grusifi.

10.

Gant eur ger e chench en aour pur  
Teir bozad douar, ha douar hudur ;  
Chenchomp ive hor pedennou  
En aour pur da gass d'an envou.

11.

Gant an aour 'reaz eur c'halir braz,  
Tri gloc'hik koant, ive teir groaz...  
Grit ma savo a-zioc'h ho penn,  
'Vit ho parea, kloc'h sant Goulien.

12.

Bouzar e zeo brema an dud,  
Pa ne glevont tud fall, a iud,  
A iud evel bleizi en noz :  
« Serrit ilizou ho tud koz ! »

13.

Mez a-bouez goulen ho skoazell,  
C'hui Eskob brudet e Kastell,  
Ha c'hui, Itron a Gelou-Mad,  
Ni 'zigoro hon daoulagad.

14.

Gant sikour sant Laurans ive,  
C'hui hor miro d'ober penze ;  
C'hui a grogo ken stard er stur  
Ma tizroimp, ha iac'h ha fur.

15.

Ni 'zelaouo an teir mouez-se,  
A ziskenn d'eomp euz bar an ee ;  
Ni 'valeo, ato laouenn  
Var roudou santel sant Goulien.